

HISTOAR VERITABL

188

Deus a Vue ha Vaillantiso

AR C'HONT BRAS MAC-MAHON

DUC DEUS A VAGENTA HA MARECHAL A FRANS

RIMET

GANT IANN AR MINOUS

A barous Pleumeur-Gautier, canton Lézardren

A piou beneg a dezir clevet breman prontamant ar vae
 Deuz ar marechal bras Mac-Mahon, ma carfe donet em bete,
 Me rofe dean scler ann detail deus ann hevelep brezellier,
 P'ehini quazi en peb batail, [dre-oll en em gave vinqueur (bis).
 Mac-Mahon, unan ar re vrassa hen deus bet ar Frans posedet,
 A den, evit guir, he origin deus a douez ann Irlandeet ;
 Ouspen ive a deu da c'henel Fransijen evit hon brassan gloar,
 N'eun departamant deus ar c'haeran [hanvet guenimp-oll Saon-a-
 Loar (bis).

Evit datan erfad ar blavez ma rez er bed-man he antre,
 A citin dec'h, evit numero, mil eiz cant eiz vla c'hoas gante,
 Pere oll a gompos he vue ebars en daou ha tri-ugent
 Ma breudeur christen ha venerabl, [a c'hui breman scler em intent (bis).

Ouspen c'hoas en em gav douguet dindan ann hano bras a gont,
 Duc Magenta ive hen c'hanver : titro bro braz a gavin soft-cont ;
 'Vit prouvin penos hon brezellier a sortie a renq huel
 Ha ma oa ann admiration [d'ann oll a-boe ma oa buguel (bis).

Lampomp eun tamic pelloc'h breman ha comzomp ive deus he dud,
 Guir vignonet d'ar Stuardet evel ma man hirre ar vrud ;
 He dad, a-c'hent-all, en em gueve eur guir vignon da Charles dec.
 Titro dimeus an honorapla [d'ar c'hont bras man me a displeg (bis).

Lezomp an Irland cren a goste a retornomp choas bars en Frans,
 Ma gontinufomp oll ar recit, quen mad, quen leun a importants,
 Dimeus a vue hon marechal, hon gloar couls evel hon zouten.
 Tennomp dioutan c'hoas ar portret [vel pa ve pentet n'eun daolen (bis)

H dail, hervoe dimp ma raporter, n'eo quet deus ann dail huellan,
 gorf, vel ann dir, a zo calet ive deus ar vigourusan ;
 visaj dous, calm ha pasiant, a distridiguez zo carguet ;
 He zello scler ha meurbet brillant, [he lagad n'he ben anfoncet (bis).

Ouspen da ze c'hoas hon bezellier, en moustaj a zo goel binviq,
 Quement hen goel a lar eo hanval ouz eur coz chasseur d'Afrique,
 He voes c'hoas, pa ro commandamant a drous en guis d'ar c'huruno,
 Pe guentoc'h en guiz d'ar roulamant [deuz ar vanden tabourino (bis).

Goude ober dec'h-u ann detail, ma breudeur-quer, en abrege
 Deus a gorf hon brezellier vaillant, demp breman d'he speret ive :
 Promtloc'h cals evit ar luc'heden. peb-tra n'eun tol a examin,
 Carguet eo dimeus ar brezeillo [a experians, inarout (bis).

Querquent ma crou eun dra n'he ide, ractal 'teu dioul'han a-benn,
Difisil eo, a dre he chifro, d'ann inimiet en em denn;
Dreist peb tra bepret ar Prussian, en quement plas a ma vale,
A c'houlen brao deus a Vac-Mahou [digant peb-unan an doare (bis).
Voar geign he aneval braz montet, he gleve gantan en he zorn,
Quement eneiñ en em brezant a zel out'han bepret a gorn;
Eur-guriosite eo gueleet he gouraj, he rapidite :
Ar voel ebqen dimeus anean [a garg a gourach he arme (bis).
Ma groan dioul'han re ann detail, ma labour a vo cals re hir,
Demp-ni 'ta oll d'en em dransporti d'eur plas hac a'hanver Saint-Cir,
Eno c'hoas a voelfomp anean gant cals a c'hloar o c'huellad
En enor hac en experians, [en majeste couls vel eo grad (bis).
Disquet gantan c'hoari ann armo quasi ebars en peb sort stum,
A plig dean dont d'ho exersin a bep-eil oll ha ruu-a-ruu ;
Vit aprou en em gav galvet da vont prontamant da Alger
Vit zicour, dre he vaillantis, [he assiegin he c'hemer (bis).
Azisted mad ebars ar plas-se, d'an noad deus ar bla var n'huguent,
Me hen goel gret ive chevalier, en profit, en gloar he guerent,
Deus ar legion hac a hanvoer eur legion vras a enor ;
Mil eis cant tregont 'ta evitan, [n'eo mui pelloc'h eun dizenor (bis).
Voar-ben seiz vla ive d'ar goude, ebars en assaut Constantin,
Non brezellier a deu da receo eun tol tan 'bars en he beútrin ;
Chetu-an promptamant iac'heet hac huellet c'hoas en grad :
En lec'h chevalier eo officier, [henorio dean 'ta dalc'h mad (bis).
Officier dimeus ar legion hac a zo meurbet honorabl,
Peb-unan a gomans da compren a beguemen eo respectabl ;
Ar vrud a barfom deus anezan a dalc'h dre-oll da barcourin,
Na voelan dean mui nep moyen [nemert en grajo da gresquin (bis).
Ar blavez se deus a vil eiz cant a c'hent all ive daou-uguent,
A dalveas vit hon brezellier na voar den mui a beguement,
Rac c'bonnes a digoras dean vertussamant cren an nor
Deus ar grad caer a chef-escadron [deus an Etat hanvet major (bis).
Me hen goel breman ho commandin ive ann degvet bataillon,
Deus ar chasseerrien var droad, ze signalin ra en peb faeson,
Ebars eun nombr braz a gombatjo, me gred penoz, hep dale pell,
En em gavo da vezan hauvet [ive lutanant-colonel (bis).
En mil eiz kant eiz-a-daou-uguent, ar grad caër ze a deu dean,
Ebarz ar legion estranjour ; gant plijadur c'hoas hen goëlan,
Ar memes bla, o vezan hanvet ive general brigaden ;
Chetu he c'hrajo, he bouerrio, [mui-ouz-mui bepred oc'h asten (bis).
Ar bla voar-lec'h ive hen goëlan groet general division,
Provins Constantin hen a gomand, Voasoc'h vit an tigr, ar leon,
Enn em gav c'hoas en Sebastopol, vit quemer Malakof ann tour
Rentan a res d'ar C'hosaquet [cals a spont, a froet, a labour (bis).
Goude ive, en Solferno, hon brezellier, enn em diskoc,
Gant couraj ha furi al leon, mad d'ober d'ann ifern bale ;
Er memes guiz c'hoas n'em discoeas ebarz en batail Magenta,
En petec'h a voc gret marechal, [duk ac'hane memes-tra (bis).
Bet eo harz ann Itali gant gloar vraz oc'h ober he rond,
Impossubl, ma breudeur, eo sitan deus he brezellio oll ar gont.

Chetu an breman en em gavet ive gand ar Prussianed,
Pere, evit hon brassan malheur, [deus-an zivoas ! goel vlesset (bis).
Chetu-an ive groet prisonnier, quement-se a gavan cruel !
Red a vezo dont d'hen delivran, criomp eta a voez huel :
He liberte d'ar c'hont Mac-Mahon, duc Magenta, hon marechal ;
Mar sonj gant Guillaumeic hen miret, [me gred en eus ar greden fall(b),
Digor eo c'hoas ar souscription d'ar c'hlenve-ze leun a enor,
Mar gall hon marechal 'ta querzet, hen a valeo gant decor ;
En pad pel-amzer hen deuz gourmet ouz ar goellan nationo.
Diou goech eb-ken eo bet blesset, [da c'hraz Doue n'eo quet maro (bis).
Quent finissen, c'hoas a fell dime, dirazoc'h, ma c'hamarado,
Sitan ar gont, hag a zo nombrus, ive dimez ar blavejo
En pere hen deus bet zervijet hon brezellier meurbet vaillant :
Daou-ugent diout'he a gontet [hag oll ez int bet eclatant (bis).
Ouspenn ive c'hoaz hon marechal, hon brezellier quen devouet,
Hen deuz bet, epad ugent blavez, ebarz ann Afriq combattet :
En Isli, en Tiemsen, en Oran, dre oll herie n'em gav brudet,
Betec memes bars en Constantin [n'eo quet c'hoas a grenn ancoet (b).
A piou bennac a dezir clevet piou ez eo ar c'hompositeur
Deus ar ganaouen a meus caned, dirazoc'h, aman, ma breudeur,
Me a respoñto buan dean ez eo hanvet lann Ar Minous.
Ann hano-ze n'en gav inscrivet [deja en lies a barous.

Iann AR MINOUS.

MELEZOUR SCLER HA PATTANT

DEUS AR GOURACH CRENV HAG ARDANT

EUS AR GARD NATIONAL

LAQUET EN RIMM

Gant IANN AR MINOUS

Tromplet braz eo ar Brussianet, 'vit mar quemeront ar greden
Da guerc'hat hon aour hag hon arc'hant ha quement tra a zo melen ;
Rac nimp, entrezomp oll, koz paotret, n'omp quet c'hoas lunedet goel-fall
Muan ta ho deuz da disfiout [eo deuz hon Goard national (bis).

Setu nimp aman enn eur vanden, prest da diarbenn ar laëron,
Ann dud fall, ann assassinerien pere a glasq enn peb fæson
Hon zanan ha zivoas ! hon lac'han, hon laërez coulz 'vel hon fillall :
Muan ta ho deuz da disfiout [eo deuz ar Goard national (bis).

'Vel glujuri oll, a vandenno, breman, hemde, 'n em dastumfomp
Enn laneyer hag er parkeyer, enn quement brous-koad a gafomp,

Hag ac'hane, enn guis jouc'hantet, nimp rei d'omp fusilio strakal :
Muan ta ho deus da disfiout [eo deus ar Goard national (bis).

Ouspenn ive c'hoas a tiskarfomp ar goez braz 'vit stoufan ann hent,
Ann hent-c'houarn ive a droc'hfomp : exact a vefomp enn peb poent
Da c'heil a c'hontel ouz ann dud-se, quen malisius lia quen fall :
Muan ta ho deuz da disfiout [eo deuz ar Goard national (bis).

Hon fouraj c'hoas ive a deofomp : ia, oll ho laquefomp enn flamm ;
Hon ed, bars ann douar, a glenqfomp, bara ive na gafongt tamm,
Red eo, dre mil-ha-mil finesse, donet breman d'ho chassel :
Muan to ho deus da disfiout [eo deus ar Goard national (bis).

Mar be red c'hoas monet da Paris, a greis kalon nimp a ielo,
D'ann Naonnet kouls evel da Raon enlin, 'n eur guir d'ann oll guerrio :
Ar Gouarnamant n'hen devo quet hon lachete mui da dammal :
Muan ta ho deus da disfiout [eo deus ar Goard national (bis).

Mad omp ive voar ar c'hosteio enn presans ann oll dud a vor,
Neus-forz en pes bro enn em guefomp nimp a gombatto gant henor,
Malheur, mil-malheur d'ar prusian a dosteo d'hon arsenal :
Muan ta ho deus da disfiout [eo deus ar Goard national (bis).

Hon groaguez dimp-nin a founisso bara, iod hag ive krampoes,
A veillo voar ann ispioued, a dale'ho propr an tiegues,
Peb a rochet goën hon d'ho ive hep manquan tol, goej-a-goej-all :
Muan ta ho deus da disfiout [eo deus ar Goard national (bis).

Hon bugale c'hoas, evel quijer, ebars ar goë, primm a grappo,
Hag ac'hane, enn guiz d'ar gaouen, he tolfongt goell-bell ho zello,
Quantan alarm eta savo a vo gante, oll ho krappal :
Muan ta ho deus da disfiout [eo deus ar Goard national (bis).

Ar piou benag a dezir klevet piou ez eo ar c'hompositeur,
Deus ar ganaouen-man a ganan dirazoc'h aman ma breudeur,
Me a respanto buan dean, kouls evel ma rafen d'eunn all,
Penos ez-eo, kouls ha peb-unan, [menbr deuz ar Gard national (bis).

Ar lec'h commun deuz he donisil, Pe guentoc'h deuz he residans,
A zo, 'vit gouir, barz enn eur barous hag a zo leun a importants,
Rak eno a tivoan ar rimo, kredet n'hen d'hon mui ho farsal,
Enn ti lann Ar Minous chansonnier, [menbr deus ar Gard national (bis).

Iann AR MINOUS,

A batous Pleumeur-Gautier, canton Lezardren.



Propriété.)